

K A I E R O U

K E N V R E U R I E Z A R B R E Z O N E G

.....

=====

K A I E R N° VIII

Miz Eost 1970

.....

Cahiers non périodiques. Souscription pour 500 pages : 10 F.

C.C.P. 193.17 Nantes, Chanoine Nédélec (Ker-Anna, 29 S Quimper)

TAOLENN AR HAIER n° VIII - Miz Eost 1970

SKRITUR ZAKR EN OVERENN hag OREZONOU

<u>SULIOU ORDINAL</u> e-doug ar bloaz	Paj.
euz an ugentved (16 a viz eost 1970)	
beteg ar 27ved (4 a viz here -)	1-34
<u>GOUEL GINIVELEZ AR WERHEZ VARI</u>	35-39

Troidigeziou aotreet da arnod, evid an eskopti,
a-berz an Aotrou F. Barbu, Eskob Kemper ha Leon.

Kemper, d'ar 4 a viz eost 1970.

+ V. Fave, eskob-skoazeller.

Notenn.- Levr-overenn an dud fidel, hirroh da gempenn eged na gredem,
a zo erfin o tond er-mêz. Ar mouladur kenta, roneotet evel ar Haierou,
a vo kaset da weled ha da lakaad en amprou da lennerien ar haierou.
Goudeze, diwar an alïou a vo bet, e vezo peurwelleet ha lakeet etre
daouarn eur mouler a vicher.

Gand ar haier n° IX, miziou Here ha Du, e vo klozet ar bloavez.
Sonj on eus lakaad ennañ ivez Sakramanr ar Briedelez, a zo prest dija
hag a heller goulenn, ma vez ezomm, digand an Ao. Nedeleg.

~~~~~

20e SUL ORDINAL / (16 Eost 1970)

Lennadenn Ia. - Furnez Doue a zo diskouezet, er pennad-mañ,  
evel unan hag a zo beo, leun a ijin, ha  
brokuz kenañ o kinnig d'an dud eur pred.

PENNAD EUZ LEVR AR FURNEZ (9/1-6)

1. Ar Furnez he deus savet he zi, kizellet ar zeiz pilier anezañ.
2. Lazet he deus he loened kig, tennet he gwin, ha renket he zaol.
3. Kaset he deus he mitizien da embann el lehiou uhel euz kêr:
4. "An neb e-neus diouer a skiant, ra zeuio d'am haoud."  
Ha d'an den diboell e lavar:
5. "Deuit da zebri euz va bara,  
ha da eva euz ar gwin am eus tennet evidoh.
6. Dilezit ho follentez, hag ho pezo buez;  
kerzit gand hent ar furnez."

SALM 33 /2-3, 10-11, 12-13, 14-15

Diskan: Tañvaït ha gwelit - pegen mad eo Doue! (Ton "Kantik ar  
..... Eüruz, eüruz an dén - e-neus fizians ennañ. Baradoz")

2. Me 'lavaro bennoz da Zoue e peb amzer;  
e veuleudi bepred war va muzellou.
3. En Aotrou Doue e lakan va enor;  
ouz va hleved, ra vo laouen an dud fidel.

10. Bevit e doujans an Aotrou, c'hwi, tud fidel dezañ;  
n'eus ket a zienez evid neb a zouj anezañ.
11. Ha pa ve gwasket tud pinvidig gand dienez ha naon,  
ar re a glask beza tost d'an Aotrou ne vank dezo netra.
12. Deuit, bugale, d'am zelaou: doujañs an Aotrou a zeskin deoh.
13. Piou eo an dén e-neus c'hoant da veva,  
ha da rén deiziou eüruz?
14. Diwallit ho teod diouz an droug, hag ho muzellou diouz ar gaou.
15. Tehit diouz an droug, ha grit ar pezh 'zo mad;  
klaskit ar peoh ha poaniit d'e vired.

\*\*\* Eil Lennadenn. - Sant Paol, d'e dro, a ro ali d'ar  
gristenien da heulia hent ar 'furnez.

PENNAD EUZ LIZER AN ABOSTOL SANT PAOL DA GRISTENIEN KER-EFEZ (5/15-20)

15. Va breudeur, sellit mad penaoz rén ho puez.  
Na vevit ket evel tud diboell, med evel tud fur.
16. En em vatait euz an amzer m'eo hoh hini,  
rag fall eo an deiziou a vevom.
17. Na vezit ket diskiant,  
med intentit mad petra eo bolontez an Aotrou Doue.
18. Diwallit da vezvi gand ar gwin, a zoug d'ar vuez diroll,  
med bezit karget euz ar Spered Santel.
19. Livirit kenetrezo salmou, himnou, ha kantikou spirituel;  
kanit ha diskanit d'an Aotrou en ho kalonou.
20. Lavarit bennoz da Zoue an Tad e peb mare hag evid peb tra,  
en ano Jezuz Krist, on Aotrou.

SALUD D'AN AVIEL.- Alleluia! Meuleudi deoh, Aotrou Krist!

Ho komzou 'zo spered ha buez.- Alleluia!

PENNAD EUZ AVIEL JEZUZ-KRIST HERVEZ SANT YANN (6/51-58)

Antronoz burzud ar bara kresket, e lavare Jezuz d'ar bobl:

51. "Me eo ar bara beo, a zo diskennet euz an neñv.

An neb a zebr euz ar bara-se a vevo da viken;

hag ar bara a roin, va horv eo, da rei buez d'ar bed."

52. Tabut a zav gand ar Juzevien etrezo, hag e lavaront:

"Penaos e hell hemañ rei deom e gorr da zebri?"

53. Jezuz eta a lavar dezo: "E gwirionez, e gwirionez, m'hen lavar deoh,

"Ma ne zebrit ket korv Mab an den, ha ma n'evit ket e wad,

n'ho peus ket ar vuez ennoh.

54. An neb a zebr va horv hag a ev va gwad, e-neus ar vuez peurbaduz,

ha me 'zavo anezañ da veo d'an deiz diweza.

55. Rag va horv a zo gwir vagadur, ha va gwad gwir evaj.

56. An neb a zebr va horv hag a ev va gwad

a jom ennon, ha me ennañ.

57. Koulz ha m'e-neus va Zad, an hini beo, kaset ahanon

hag am eus buez dre va Zad,

an neb a zebr ahanon, hennez ive e-no buez drezon.

58. Setu pehini eo ar bara a zo diskennet euz an neñv;

er hontrol d'ho tadou, o deus bet ar mann da zebri hag a zo maro,

an neb a zebr ar bara-mañ a vevo da viken."

\*\*\*\*\*

OREZONOU an XXved SUL

KEMPEDENN.- Pedom Doue...

Aotrou Doue, evid an dud ho kar  
ho peus preparet madou na weler ket:  
skuillit ho karantez en or halonou,  
evid ma karim ahanoh bepred ha dreist peb tra,  
ha ma hounezim an eürusted a brometit,  
hag a zo en tu all da beb c'hoant.  
Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,  
Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan, a oll viskoaz...

WAR AR PROVOU.

Plijet ganeoh, Aotrou Doue, digemer or provou,  
a reom ganto an eskemm n'e-neus ket e bar:  
pegwir, diwar ginnig ar pezh 'zo bet roet deom ganeoh,  
c'hwi hoh-unan eo a resevim.  
Dre Jezuz Krist, or Zalver.- Amen.

GOUDE KOMUNIA.- Pedom asamblez...

Bremañ p'on eus resevet Or Zalver er zakramant,  
emaom stouet izel da bedi ho madelez, Aotrou Doue:  
grit deom tenna dezañ atao gwelloh er bed-mañ,  
evid kaoud perz gantañ e gloar ar baradoz,  
Eñ on Doue beo, a oll viskoaz da virviken.- Amen.

\*\*\*\*\*

21° SUL ORDINAL ( 23 Eost 1970 )Lennadenn Ia..- Pobl Israel a bromet chom fidel da Zoue.PENNAD EUZ LEVR JOZUE ( 2 /1-2a, 15-18)

1. En amzer-se, Jozue (rener pobl Israel war-lerh Moizez)  
e-neus grêt da oll veuriadou (= gall. "tribus") Israel  
en em voda e kêr Sikem;  
galvet e-neus d'e gaoud ar re goz euz ar bobl,  
ar pennou braz, ar varnerien hag an dud e karg,  
hag ez int deuet, dirag sellou an Aotrou Doue.
- 2a. Neuze e lavar Jozue d'ar bobl a-béz:
15. "Ma kavit fall kaoud an Aotrou da zervicha,  
dibabit en deiz-mañ piou a 'fell deoh servicha:  
pe an doueed a zerviche ho tadou en tu all d'ar Ster vraz,  
pe re an Amoreaned, emach en o bro bremañ.  
Evidon-me ha va zud, an Aotrou eo a 'fell deom servicha."
16. Sevel a ra mouez ar bobl da respont: "Kentoh mervel  
eged trei kein d'an Aotrou evid servicha doueed all.
17. Rag an Aotrou, on Doue, eo e-neus grêt deom ha d'on tadou  
dond er-mêz euz Bro-Ejipt, an ti a oam sklaved ennañ;  
eñ eo e-neus grêt ken braz burzudou dirag on daoulagad,  
hag e-neus on diwallet hed-a-hed an hent on eus bet da ober  
a-dreuz an oll bobladou ez om tremenet en o zouez.
- 18b. Ni ivez a' fell deom servicha an Aotrou,  
rag eñ eo on Doue."

\*\*\*\*\*

SALM 33 / 2-3, 12-13, 17,23

Diskan: Tañvaït, ha gwelit - pegen mad eo Doue;  
Eüruz, eüruz an dén - e-neus fizians ennañ.

2. Me 'lavarao bennoz da Zoue e peb amzer,  
e veuleudi bepred war va muzellou.
3. En Aotrou Doue e lakan va enor;  
ouz va hlevéd, ra vo laouen an dud fidel.
12. Deuit, bugale, d'am zelaou: doujans an Aotrou a zeskin deoh.
13. Piou eo an dén e-neus c'hoant da veva,  
ha da rén deiziou eüruz?
17. An Aotrou a bar e zaoulagad war an dud just,  
trei a ra e ziskouarn da zelaou o fedenn.
23. An Aotrou a zaveteo e zervicherien;  
ne vo kastiz ebed evid an neb a esper ennañ.

\*\*\*\*\*

Eil Lennadenn.- Ar garantez etre priejou a dle kemer skouer  
diwar hini Or Zalver, pried e Iliz, karet  
ha peurgaret gantañ, beteg rei e vuez eviti.

PENNAD EUZ LIZER AN ABOSTOL SANT PAOL DA GRISTENIEN KER-EFEZ (5/21-32)

21. Va breudeur, plegit an eil d'egile, dre zoujans evid an Aotrou Krist.
22. Ar gwragez d'o friejou, evel d'Or Zalver;
23. rag, evid ar vaouez, ar gwaz a zo ar penn,  
evel m'eo an Aotrou Krist ar penn evid an Iliz, e gorv,  
eñ hag a zo ivez ar Zalver anezi.

24. Hogen, an Iliz a zuj d'an Aotrou Krist;  
en heveleb doare, e tle ar gwragez suja d'o friejou e peb tra.
25. C'hwi, gwazed, karit ho kwragez  
evel m'e-neus an Aotrou Krist karet an Iliz:  
en em roet e-neus eviti,
26. evid he santellaad en eur walhi anezi  
gand dour ar vadiziant hag ar gomz a vuez.
27. Felloud a ree dezañ he lakad da bara dirazañ, an Iliz-se kaer meurbed,  
na si, na rouvenn warni, na netra all evelse,  
med santel ha divlam.
28. Setu aze penaoz e tle ar wazed kared o friejou,  
evel ma karont o horv o-unan.  
Kared ar pried a zo en em gared an-unan.
29. Biskoaz den ebed n'e-neus bet heug ouz e gorv e-unan;  
er hontrol, e vaga a ra, ha kemer soursi anezañ,  
ha setu petra 'ra an Aotrou Krist evid an Iliz,
30. o veza ma'z om izili euz e gorv.
31. Ablamour da ze, (a lavar ar Skritur)  
e kuitaio ar gwaz e dad hag e vamm, hag e stago ouz e wreg,  
ha ne vezint o daou nemed unan.
32. Braz eo ar mister-se, hen lavared a ran o sonjal  
en Aotrou Krist hag en Iliz.

\*\*\*\*\*

SALUD D'AN AVIEL.- Alleluia! Meuleudi deoh, Aotrou Krist!  
Ganeoh emañ komzou ar vuez.- Alleluia!

PENNAD EUZ AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT YANN (6/60-69)

En amzer-se, o prezeg e sinagog Kafarnaom, Jezuz e-neus lavaret:

"An neb a zebr va horv hag a ev va gwad e-neus ar vuez peurbaduz."

60. Kalz euz e ziskibien, o klevet kement-se, a lavar:

"Kaled eo ar homzou-se da glevet!

Piou a zo gouest d'o zelaou?"

61. Jezuz, o houzoud ennañ e-unan emañ e ziskibien o hrozmolad etrezo,  
a lavar dezo: "Feuket oh gand an dra-ze?

62. Ha ma welfeh eta Mab an dén o pignad d'al leh m'edo diagent?

63. Ar spered eo a ro buez, ar horv ne dalvez da netra.

Spered eo, ha buez eo ar homzou am eus lavaret deoh.

64. Med bez' ez eus en ho touez ha ne gredont ket."

Rag goûd a ouie Jezuz, evid ar wech,

pere eo ar re diskredig, ha piou a dle e werza.

65. Hag e lavar dezo c'hoaz:

"Setu perag am eus lavaret deoh ne hell nikun dond davedon,  
nemed ha gand va Zad e vefe bet roet dezañ dond."

66. Diwar neuze, kalz euz e ziskibien a zo eet war o hiz,  
ha n'int ket eet gantañ mui.

67. Jezuz, neuze, a lavar d'an Daouzeg (abostol):

"Daoust ha c'hwi ivez ho peus c'hoant da vond kuit?"

68. Simon Per a respont dezañ:

"Aotrou, da gaoud piou ez afem?

Ganeoh emañ komzou ar vuez peurbaduz.

Evidom-ni a gred, ha ni a oar

ez oh-c'hwi Dén santel Doue (pe: ar Zant euz a Zoue)."

\*\*\*\*\*

OREZONOU AN 21<sup>ved</sup> SULKEMPEDENN.- Pedom Doue...

Aotrou Doue, c'hwi a lak an oll gristenien da gaoud ar memez bolontez:  
grit deom kared ho kourhemennou, ha c'hoantaad ar madou a brometit,  
hag evelse, tra ma vez traou ar bed-mañ o trei hag o tistrei,  
chom heb distaga or halonou euz bro ar wir levenez.

Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou, Doue beo ganeoh  
ha gand ar Spered Glan, a oll viskoaz da virviken.- R/. Amen.

WAR AR PROVOU -

Aotrou Doue, dre zakrifis Or Zalver grêt eur wech evid mad,  
eo bet prenet an dud da veza pobl ho pugale:  
plijet ganeoh, en ho madelez,  
rei deom gras an unaniez hag ar peoh en hoh Iliz.

Dre Jezuz Krist, or Zalver.- R/. Amen.

GOUDE KOMUNIA.- Pedom oll asamblez...

Ho pedi a reom, Aotrou Doue, ma labouro ennom  
vertuz ar remed roet d'on eneo gand ho trugarez;  
ha grit ahanom seurd kristenien, atao war wellaad,  
ma hellim plijoud deoh e peb tra.

Dre Jezuz Krist, or Zalver.- R/. Amen.

\*\*\*\*\*

22° SUL ORDINAL (30 Eost 1970)

Lennadenn Ia.- Selaouom Moizez o tisplega da bobl Israel  
talvoudegez dispar Lezenn Doue.

PENNAD EUZ LEVR AN ADLEZENN (4/1-4, 6-8)

1. Evelhénn e komze Moizez ouz pobl Israel:  
"Bremañ, Israel, selaouit al lezennou hag ar gourhemennou  
a roan deoh da anaoud, evid deoh o heulia.  
Evelse ho pezo buez, hag eh antreet e mistri  
er vro a ro deoh an Aotrou, Doue ho tadou.
2. N'ho peus netra da astenn ouz ar pez a hourhemennan deoh,  
ha netra da zilam;  
med mired a reot gourhemennou an Aotrou, ho Toue,  
evel m'o hemennan deoh.
6. C'hwi o miro hag o heulio;  
Diskouez a raint ho furnez hag ho skiant dirag ar poblou all.  
Pa glevo ar poblou ano euz an oll lezennou-se, e lavarint:  
N'eus poblad all ebed fur ha skianteg  
evel m'eo ar vroad dispar-se."
7. E peleh eta emañ ar vroad veur he deus doueed tost dezi,  
evel m'eo tost deom an Aotrou, on Doue,  
ken liez gwech ma pedom anezañ?
8. E peleh emañ ar vroad veur  
a vefe ken just he lezennou hag he gourhemennou,  
evel al lezenn-mañ penn-da-benn  
a lakan hirio dirag ho taoulagad?"

\*\*\*\*\*

SALM 14 / 2-3a, 3cd-4ab, 4c-5

Diskan: Piou an den eüruz a hello beza - \*\* Ton: Eüruz an hini...  
 ..... digemeret mad e ti kaer Doue?

2. An hini a rén e vuez dinamm hag a boagn da ober ar mad,  
 a lavar atao ar wirionez evel m'emañ en e galon,
- 3a. ha ne vez en e henou na komzou binimuz na teodadou.
- 3cd. Ne ra morse droug d'e nesa,  
 ha ne daol ket dismegans war e amezeg.
- 4ab. ne ra stad ebed euz an den dizakr,  
 med enori a ra an dud a zoujans Doue.
- 4c. Pa 'neus grêt le, ne dorr ket e hér, ha pa ve diwar e goust.
5. Ne ro ket e arhant war interest,  
 ha ne gemer ket a brovou evid gwaska an den divlam.  
 An neb a rén e vuez evelse, biken ne vo diskaret.

\*\*\*\*\*

Eil Lennadenn.- Sant Jakez a zelaouim bremañ epad  
 eur miz. Amañ e tiskouez deom pebez nerz a zo  
 gand komz Doue.

PENNAD EUZ LIZER SANT JAKEZ (1/17-18, 21b-22, 27.

17. Va breudeur, kement gras ar gwella ha kement donezon peurvad  
 a zeu euz an neñv:  
 diskenn a reont a-berz an Tad, krouer ar stered,  
 an hini n'eus ennañ na loariadenn, nag an disterra fallaenn.
18. Fellet eo bet gantañ ober ahanom e vugale dre ar gomz a wirionez,  
 evid ma vefem, evel pa lavarjen, ar re genta euz e dud.
21. Digemerit eta gand douster ar gomz silet ennoh,  
 hag he deus nerz da zavetei hoh eneou.

22. E-keñver komzou Doue, bezit oberourien,  
ha n'eo ket selaouerien hebken, oh en em douella hoh-unan.  
(pe: Lakit komz Doue en ho puez, ha n'eo ket selaou anezi hebken:  
en em douella hoh-unan ne rafeh kén.)
27. Dirag Doue, on Tad, an doare eeun ha direbech da gaoud relijion  
eo hemañ:  
kemer soursi euz an emzivadeg hag an intañvezed en o zrubuillou,  
hag en em vired digaillar diouz ar bed.

\*\*\*\*\*

SALUD D'AN AVIEL. - Alleluia! Meuleudi... Ho komzou a zo gwirionez.

PENNAD EUZ AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT MARK (7/1-8a, 14-15, 21-23)

1. En amzer-se, setu bodet en-dro da Jezuz ar Farizianed  
hag eun toullad skribed deuet euz Jeruzalem.
2. hag o deus gwelet lod euz e ziskibien o tebri o fred  
gand o daouarn dihlant, da lavared eo heb beza o gwalhet.
3. Red eo gouzoud e talh ar Farizianed, hag an oll Juzevien zoken,  
da heulia ar boaziou deuet dezo euz o zud koz:  
ne zebront ket heb beza gwalhet o daouarn e doare;
4. o tistrei d'ar gêr euz plasenn ar marhad,  
ne zebront ket heb beza strinket dour warno o-unan,  
ha liez boazamant all c'hoaz a heuliont, deuet dezo euz o zud koz,  
pa vez kont da walhi hanafou, podou, listri arem.
5. Goulenn a ra eta ar Farizianed hag ar skribed ouz Jezuz:  
"Perag ne heuil ket ho tiskibien gizioù on tud koz,  
hag e kemeront o frejou gand o daouarn dihlant?"

6. Respont a ra Jezuz dezo: "Re vad e-neus Izaiaz grêt e brofed  
diwar ho penn, tud faoz ma 'z oh, evel m'eo merket er Skritur:  
Va enori a ra ar bobl-mañ diwar beg he muzellou,  
o halon, avad, a zo pell diouzin;  
7. n'o deus priz ebed al lidou a reont en enor din,  
rag o helennadurez n'eus anezi nemed gourhemennou-dén.  
8. Lezel a rit a gostez gourhemenn Doue,  
evid mired boazamanchou an dud."  
14. Neuze e lavar Jezuz d'ar bobl tostaad outañ adarre:  
"Va zelaouit oll, emezañ, hag intentit mad.  
15. N'eo ket ar pezh a zo er-mêz euz an dén  
a hell lakad an dén da veza dihlan en eur vond en e gorr,  
med ar pezh a zeu er-mêz euz kalon an dén,  
setu petra 'lak an dén da veza dihlan.  
21. Rag euz diabarzh an dén, euz e galon eo e teu ar zoñj d'ober an droug,  
evel ma'z eo: gadaliez, laeronzi, muntrerez, avoultrij,  
22. karantez direiz d'ar madou, fallagriez, tromplerez, hudurnez,  
avi, drouk-komz, brasoni (pe: ourgouill), follentez dall.  
23. An oll draou fall-se a zeu euz an diabarzh  
hag a ra d'an den beza dihlan."

\*\*\*\*\*

OREZONOU AN 22-ved SUL

KEMPEDENN - Pedom Doue...

Aotrou Doue, krouer ar bed, diganeoh e teu peb donezon peurvad:  
sankit don en or halonou ar garantez evid hoh ano,  
magit ar pezh a zo a wella ennom, en eur startaad on liammou ganeoh,  
ha beillit warnom da ziwall kement a vo bet maget ganeoh.

Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,  
Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan, a oll viskoaz...

(Notenn.- D'ar 6ved Sul goude ar Pantekost e oa ar gempedenn-  
mañ: "Deus virtutum, cujus est totum...")

WAR AR PROVOU.-

Ar zakrifis santel, Aotrou Doue, ra lako bepred da ziskenn warnom  
ar vennoz a zilvidigez, evid ma teuo da vad en or buez  
ar pezh a vez grêt en overenn dindan spesou ar zakramant.

Dre Jezuz Krist, or Zalver.- R/ Amen.

GOUDE KOMUNIA.- Pedom oll a-unan...

Maget om bet ouz an daol zantel gand ar bara euz an neñv,  
hag ho pedi a reom kaloneg, Aotrou Doue:  
pa 'z eo ar zakramant-mañ magadur ar garantez,  
ra zigaso nerz d'or halonou evid ho servicha én or breudeur.

(pe: e-ser servij or breudeur)

Dre Jezuz Krist, or Zalver.- R/ Ameh.

\*\*\*\*\*

23° SUL ORDINAL / (6 Gwengolo 1970)

Lennadenn Ia. - Kelou ar zilvidigez hag an eürusted  
evid an dud a zo er boan.

PENNAD EUZ LEVR AR PROFED ISAIAZ (35/4-7)

4. Lavarit d'ar re a zo strafuillet o spered:  
"Kemerit kalon, aon ebed da gaoud!  
Setu ho Toue: digantañ e-no pep hini e begement;  
Doue a jencho penn d'ar vaz;  
Dond a ra e-unan, hag ho savetei a ray.
5. Neuze e vo digoret daoulagad an dud dall,  
ha distanket diskouarn ar re vouzar.
6. Neuze e lammo an den kamm evel eur haro,  
hag e vo distagellet teod an hini mud.  
Neuze e tarzo an dour er goueleh (pe: dezert)  
hag e redo ar froudou dour en douarou dizeh.
7. An douar skarnilet a droio da lennad dour,  
hag ar vro eet dizeh da stivellou (pe: feunteuniou).

\*\*\*\*\*

SALM 145 / 7, 8-9a, 9bc-10 Diskan: Meulom Doue, va ene!  
..... Me 'veulo Doue keit ha ma vevin.

7. D'an dud a vez gwasket e rent o gwir,  
d'ar re o deus naon e ro bara,  
d'ar re 'zo er jadennoù e ro ar frankiz.
8. An Aotrou eo a ro sklerijenn d'an dud dall,  
an Aotrou a laka sonn ar re 'zo krommet,  
an Aotrou a gar an dud fidel d'al lezenn.

9. An Aotrou 'zo divennour an dud estren,  
skoazeller an emzivad hag an intañvez;  
derhel a ra d'e bromesaou da viken.

\*\*\*\*\*

Eil Lennadenn.- War roudou Or Zalver, ar gristenien,  
e-leh beza a-du gand ar binvidien ha dispriz ar beorien,  
a droio kentoh gand ar re-mañ.

PENNAD EUZ LIZER SANT JAKEZ (2/1-5)

1. Va breudeur, arabad e teufe an doujans evid den ha den  
da boueza war ho feiz e Jezuz Krist, on Aotrou leun a hloar.
2. Lakom e teufe en ho touez  
eun dén gand dillad kaer, eur walenn aour ouz e viz,  
hag er memez amzer eur paour, gwisket divalo,
3. hag e taolfeh evez ouz an hini gwisket kaer, o lavared dezañ:  
"Azezit amañ, er plas a enor."  
e-keit ha ma lavarfeh d'ar paour: "Chom du-ze en da zav!"  
pe: "Azez amañ e-harz va skabell."
4. Daoust ha n'eo ket aze lakad kemm etrezoh  
ha beza barnerien o zonzou fallagr?
5. Selaouit eta, va breudeur muia karet.  
Daoust ha n'e-neus ket Doue choazet ar re 'zo paour hervez ar bed  
evid beza pinvidig a feiz, hag heritourien  
ar rouantelez e-neus prometet d'ar re a gar anezañ?

\*\*\*\*\*

SALUD D'AN AVIEL.- Alleluia! Meuleudi deoh, Aotrou Krist!  
Grit deom selaou mad ho komzou. Alleluia!

PENNAD EUZ AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT MARK (7/31-37)

31. En amzer-se, Jezuz a guita kornad-bro Tir, tremen a ra dre gêr Sidon,  
ha dond etrezeg mor Bro-Halile, e-kreiz kornad an Deg-Kêr.
32. Digas a reer dezañ eun den bouzar ha mud,  
o houlenn digantañ astenn e zorn warnañ.
33. Jezuz a gemer anezañ gantañ a-gostez, er-mêz euz an engroez;  
lakaad a ra e vizied en e ziskouarn, hag euz e granch war e deod.
34. O veza savet e zaoulagad warzu' an neñv, e ra eun huanadenn,  
hag e lavar d'an den: "Effata!" da lavared eo: Digor!
35. Ha kerkent eo bet digoret e ziskouarn,  
ha distagellet e deod, hag e komze distag mad.
36. Divenn a ra Jezuz outo ranna gêr da zen;  
med, seulvui e tivenne outo, seulvui eh embannet ar helou.
37. Dreist-muzul e oa estlamm an dud, hag e lavarent:  
"Kaer dreist e-neus grêt peb tra:  
ar hleved a ro d'ar re vouzar, hag ar prezeg d'ar re vud."

\*\*\*\*\*

AN OREZONOU er bajenn war-lerh.- Amañ an destenn latin anezo:

- 1) Deus, per quem nobis et redemptio venit et praestatur adoptio,  
filios dilectionis tuae benignus intende, ut in Christo credentibus  
et vera tribuatur libertas, et haereditas aeterna. Per...
- 2) Deus, auctor sinceræ devotionis et pacis, da, quaesumus,  
ut et majestatem tuam convenienter hoc munere veneremur,  
et sacri participatione mysterii fideliter sensibus uniamur. Per...
- 3) Da fidelibus tuis, Domine, quos et verbi tui et caelesti sacrament  
nutris et vivificas, ita dilecti Filii tui tantis muneribus profic  
ut ejus vitae semper consortes effici mereamur. Per...

OREZONOU EVID AN 23° SUL

KEMPEDENN.- Pedom Doue...

Aotrou Doue, dre ho karantez evid an dud  
om bet prenet ha grêt bugale deoh:  
sellit eta gand madelez ouz ho pugale garet,  
evid ma hello ar re a gred en Or Zalver  
beva e gwir frankiz er bed-mañ ha gounid an heritaj peurbaduz.  
Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,  
Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan, a oll viskoaz...

WAR AR PROVOU.-

Aotrou Doue, mammenn ar garantez hag ar peoh gwirion,  
grit da genta, ni ho ped, ma hellim.  
hoh enori evel m'eo dleet dre ar brovadenn-mañ,  
ha grit ivez ma vezim unanet en or menoziou gand ar memez feiz  
en eur gemer perz en overenn zantel.  
Dre Jezuz Krist, or Zalver.- R/ Amen.

GOUDE KOMUNIA.- Pedom oll a-unan...

D'ho kristenien fidel, Aotrou Doue, e roit dalhmad magadur ha buez  
koulz dre ho komzou ha dre zakramant an aoter:  
grit dezo en em vataad euz donezonou ken braz ho Mab karet,  
evid beza lodeg en e vuez bepred.  
Dre Jezuz Krist, or Zalver.- R/ Amen.

\*\*\*\*\*

24° SUL ORDINAL (13 Gwengolo 1970)

Lennadenn Ia..- Ar Zalver, anvet amañ Servicher an Aotrou Doue,  
a glêvöm, dre henou ar profed, o lavared pegen kriz eo  
an dud outañ, med gouzoud a ra ne vo ket dilezet.

PENNAD EUZ LEVR AR PROFED IZAIAS (50/5-9)

5. An Aotrou Doue e-neus digoret din va skouarn.  
Me n'am eus ket enebet, n'am eus ket tennet a-dreñv.
6. Va hein am eus troet d'ar re a skoe warnon,  
ha va dioujod d'ar re a ziframme va baro;  
n'am eus ket dizroet va fas diouz an dismegansou hag an taoliou krañch.
7. An Aotrou Doue eo a zeu d'am zikour:  
rag-se n'on ket glazet gand an dismegansou,  
rag-se am eus laket va fas ken kaled hag eur mên,  
ha gouzoud a ran n'am-mo ket méz da gaoud.
8. Em hichen emañ an hini am didamallo;  
Piou a raio klemm ouzin? Deom asamblez dirag ar barner!  
Piou a 'fell dezañ sevel a-eneb din? N'e-neus nemed dond!
9. Setu an Aotrou Doue a zeu d'am zikour: piou am hondaono?

\*\*\*\*\*

SALM 114/1-2, 3-4, 5-6, 8-9. Diskan: Me 'blijio din beva dirag sellou Doue,  
..... E bro ar re veo, bremañ ha da viken.

1. Pebez karantez am eus evid an Aotrou Doue,  
rag selaouet e-neus mouez va 'fedenn.
2. Ya, troet e-neus e skouarn warzu ennon,  
en deiz ma halven anezañ d'am zikour.

3. Luiet e oan e lasou an Ankou, paket e rouejou bro ar re varo,  
beuzet gand glahar hag enkrez,
4. p'am eus galvet an Aotrou da zavetei va buez.
5. Madelezuz eo an Aotrou, ha just eo ivez;  
ya, on Doue a oar truezi.
6. Divennour ar re vianig eo an Aotrou;  
pa oan kouezet dinerz, e-neus va zaveteet.
8. Diwallet e-neus va buez euz ar maro,  
va daoulagad euz an daelou, ha va zreid euz al lamm.
9. Ober a rin hent c'hoaz dirag sellou an Aotrou,  
war zouar an dud veo.

\*\*\*\*\*

Eil Lennadenn. - N'eus ket a feiz gwirion hab an oberou.

PENNAD EUZ LIZER SANT JAKEZ (2/14-18)

14. Va breudeur, da betra e talvez d'aun dén lavared e-neus feiz,  
ma n'e-neus ket an oberou?  
Daoust hag ar feiz-se a hello e zavetei?
15. Lakom e vefe unan bennag euz or breudeur hag or hoarezed  
ha n'o deus ket peadra d'en em wiska,  
na peadra da zebri bemdez:
16. ma lavar unan ahanoh dezo: "It e peoh, da domma ha da zebri ho kwalh"  
med heb rei dezo ar pez o deus ezomm evid o horv,  
da betra e talvez kement-se?
17. En heveleb doare emañ kont gand ar feiz:  
ma ne zeu ket oberou d'he heul, ez eo eur feiz maro.
18. Gelllet e vefe lavared dezañ: "Te az peus feiz, ha me oberou.  
Diskouez din 'ta da feiz heb an oberou;  
me eo, dre va oberou, a ziskouezo dit va feiz."

SALUD D'AN AVIEL.- Alleluia! Meuleudi deoh, Aotrou Krist!

C'hwi 'zo Mab an Doue beo.- Alleluia!

PENNAD EUZ AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT MARK (8/27-35)

27. En amzer-se, eo eet Jezuz gand e ziskibien  
       etrezeg kêriadennou Sezare-Filip,  
       ha war an hent e ra ar goulenn-mañ ouz e ziskibien:  
       "Piou a lavar an dud ez on-me?"
28. Int-i da respont: "Yann Vadezour; re all a lavar Eliaz,  
       re all c'hoaz unan euz ar brofeted."
29. "Ha c'hwi, emezañ adarre, piou a lavarit ez on-me?"  
       Per a zav e vouez da respont: "C'hwi 'zo ar Zalver."
30. Jezuz, neuze, a zivenn groñs outo  
       lavared an dra-ze anezañ da zén.
31. Evid ar wech kenta, e krog neuze da gelenn dezo  
       e tle Mab an dén gouzañv kalz,  
       beza diañzavet gand re goz ar bobl, ar veleien vraz hag ar skribed,  
       beza lakeet d'ar maro, ha, tri devez goude, adsevel da veo.
32. Sklêr ha didro eo e gomzou war gement-se.  
       Per, neuze, a denn anezañ a-gostez  
       hag a stag da ober gourdrouz (pe: rebechadou) dezañ.
33. Jezuz a zizro, a ra eur zell ouz e ziskibien,  
       hag a ra gourdrouz da Ber, en eur lavared:  
       "Teh a-dreñv din, Satan! rag da zonzjou n'int ket re Doue, med re an dud."
34. Goudeze, e halv an dud da zond d'e gaoud, a-unan gand e ziskibien:  
       "An neb a 'fell dezañ dond war va lerh, emezañ,  
       a dle trei kein dezañ e-unan, kemer e groaz, ha dond d'am heul.
35. Rag an neb a 'fello dezañ savetei e vuez, a gollo anezi;  
       med an neb a gollo e vuez ablamour din ha d'an Aviel, a zaveteo anezi."

OREZONOU AR 24° SUL

KEMPEDENN.- Pedom Doue...

Taolit ho sellou warnom, Aotrou Doue, krouer ha rener peb tra:  
hag, evid m'anavezim ar vad a ra ho trugarez evidom,  
grit deom en em rei a greiz or halon d'ho servicha.  
Dre Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou, Doue beo'ganeoh ha  
gand ar Spered Glan, a oll viskoaz da virviken.- R/ Amen.

WAR AR PROVOU.-

Selaouit or pedennou gand madelez, Aotrou Doue,  
ha grit digemer vad da brovou ho servicherien,  
evid ma vo ar pez a ginnig peb unan d'hoh enori  
talvouduz evid silvidigez an oll.  
Dre Jezuz Krist, or Zalver.- R/ Amen.

GOUDE KOMUNIA.- Pedom oll a-unan...

Ho pedi a reom, Aotrou Doue, ma teuio vertuz ar zakramant  
da garga ahanom, korv hag ene,  
evid ma vim renet gand gras ar zakramant-se,  
kentoh eged gand or menozioù on-unan.  
Dre Jezuz Krist, or Zalver.- R/ Amen.

\*\*\*\*\*

25° SUL ORDINAL / (20 Gwengolo 1970)

Lennadenn Ia..- Ar Skritur Zakr a ziskouez an dud a zroug  
oh en em glevet evid laza an den just.

PENNAD EUZ LEVR AR FURNEZ (2/12, 17-20)

An dud a zroug o deus lavaret etrezo:

12. "Lakom enk war an dén just, rag hegasuz eo evidom;  
a-eneb on doare da veva emañ, rebech a ra deom terri al Lezenn,  
hag on tamall a ra da drei kein d'ar gelennadurez on eus bet.
17. Gwelom 'ta ha gwir eo e gomzou,  
ha taolom evez petra hoarvezo gantañ da echui.
18. Rag, ma'z eo an den just-se mab da Zoue, e teuio Doue d'e skoazella,  
hag e tenno anezañ a-dre daouarn e enebourien.
19. Gwaskom anezañ, taolom warnañ dismegansou ha tourmanchou,  
da weled ha dous eo, pe get,  
ha mad eo da houzañv, pe get.
20. Barnom anezañ d'eur maro mezuz,  
pegwif, war e veno, e teuio sikour dezañ."

\*\*\*\*\*

SALM 53 / 3-4, 5, 5 & 8.- Diskan: An Aotrou a zo divennour va buez.

3. Va Doue, saveteit ahanon evid enor hoh ano,  
rentit din va gwir dre ho kalloud.
4. Va Doue, selaouit va fedenn, intentit ar homzou a lavaran.
5. Tud estren a zo savet em eneb; tud kriz a glask lemel va buez diganin,  
tud ha ne vez ket Doue dirag ho zellou.
6. Setu Doue o tond d'am zikour; an Aotrou eo gwella divennour va buez.
8. A greiz va halon e kinnigin deoh sakrifisou;  
trugarekaad a rin hoh ano, ker braz eo ho madelez.

Eil Lennadenn. - Da heul ar wir furnez, buez vad ha peoh;  
med diwar ar youlou fall, brezel ha dizurz.

PENNAD EUZ LIZER SANT JAKEZ (3/16 - 4/3)

16. Va breudeur, diwar gwarizi ha tabut,  
e sav dizurz ha droug a beb seurd.
17. Er hontrol, ar Furnez euz a Zoue a zo, da genta, divlam,  
ha diwar-ze, troet gand ar peoh hag an douster, êz da veva,  
leun a drugarez, puill a frouez mad,  
n'eo ket aheurtet a-eneb dén, leal gand an oll.
18. Er peoh eo e vez taolet an had a zoug frouez eur vuez vad  
evid ar re a vir ar peoh.
- 4/1. A beleh e teu brezelioù, a beleh e sav trouz en ho touez?  
Daoust ha n'eo ket euz ho youlou fall o virvi en hoh izili?
2. Ho c'hoant a daolit war draou 'zo, ha n'ho peus ket anezo,  
ha setu ez it beteg laza;  
avi a grog ennoh, hag e chomit berr da gaoud tra,  
setu e rit emgann ha brezel.  
Ha chom a rit heb kaoud, o veza ma ne bedit ket.
3. Pe, ma pedit, ne resevit ket ho koulenn, o veza ma pedit fall,  
gand ar zonz da zispign er plijadurioù.

\*\*\*\*\*

SALUD D'AN AVIEL. - Alleluia!...

PENNAD EUZ AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT MARK (9/30-37)

30. En amzer-se, Jezuz a ree hent gand e ziskibien a-dreuz Bro-Halile,  
ha ne felle ket dezañ e vije gouezet.
31. Rag bez' e-noa da gelenn e ziskibien, hag e lavare dezo:  
"Mab an dén a zo o vond da goueza etre daouarn an dud,  
lakeet e vo ganto d'ar maro,  
ha, tri devez goude e varo, eh adsavo da veo."
32. Hogen an diskibien ne intentent ket ar homzou-se,  
ha ne gredent ket ober goulennou outañ.
33. Erruoud a reont e kêr Gafarnaom;  
eur wech antreet en ti, Jezuz a houlenn outo:  
"Diwarbenn petra e oa kaoz ganeoh a-hed an hent?"
33. Chom a reont dilavar,  
rag a-hed an hent ez eus bet kuzul ganto  
da houzoud pehini eo ar brasa.
35. Jezuz a ya d'azeza, hag a halv an daouzeg abostol d'e gaoud.  
Lavared a ra dezo: "Ma fell da unan (bennag) beza ar henta,  
dezañ beza an diweza ha servicher an oll."
36. Kemer a ra eur bugelig, hag e lakaad en o hreiz;  
o veza stardet anezañ etre e zivreh, e lavar dezo:
37. "An neb piou bennag a zigemer em ano (pe: ablamour din)  
eur bugelig evel hemañ,  
am digemer me va-unan,  
hag an neb am digemer, n'eo ket din e ra digemer,  
med d'an hini e-neus kaset ahanon."

\*\*\*\*\*

OREZONOU AR 25° SUL

KEMPEDENN.- Pedom Doue...

Aotrou Doue, an oll gourhemennou euz ho lezenn  
ho peus dastumet en unan: ho kared-c'hwi ha kared an nesa:  
    grit deom heulia mad ho kourhemennou  
    ha gounid evelse ar vuez peurbaduz.  
Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou, Doue beo ganeoh  
    ha gand ar Spered Glan, a oll viskoaz da virviken.- Amen.

WAR AR PROVOU.-

Plijet ganeoh, Aotrou Doue, digemer gand madelez  
    provou ho pùgale gristen:  
ar pezh a reont hag a anzavont en overenn gand devosion ha feiz,  
grit ma resevint ar frouez anezañ  
    dre ar zakramant euz an neñv.  
Dre Jezuz Krist, or Zalver.- R/ Amen.

GOUDE KOMUNIA.- Pedom oll a-unan...

Aotrou Doue, pa zigasit nerz nevez deom dre ar gomunion,  
kendalhit d'or skoazella bepred gand madelez,  
deom da reseo frouez ar zilvidigez  
    en or buez penn-da-benn koulz hag en overenn.  
Dre Jezuz Krist, or Zalver.- R/ Amen.

\*\*\*\*\*

26° SUL ORDINAL / (27 Gwengolo 1970)

Lennadenn Ia.- Moïzez a zesk d'e zervicher ez eo mestr an  
 -----  
 Aotrou Doue da rei donezonou e Spered d'an neb a gar.

PENNAD EUZ LEVR AN NIVEROU, pevare levr Moïzez (11/25-29)

25. An Aotrou Doue, diskennet a-dreuz ar goabrenn da gomz gand Moïzez,  
 e-neus kemeret euz ar Spered a oa warnañ,  
 da rei d'an deg-ha-triugent a oa re gor ar bobl;  
 kerkent ha diskennet ar Spered warno, ez int kroget da brofetiza,  
 med kement-se n'eo ket padet.
26. Hogen, bez' e oa chomet daou zen er hamp:  
 unan a oa Eldad e ano, egile Medad,  
 hag ar Spered a zo diskennet warno ive;  
 bez' e oa laket o ano war ar roll,  
 med n'int ket eet d'an deltenn.
27. Pa 'z int kroget da brofetiza,  
 eur paotr yaouank a ya d'ar red da rei kelou da Voizez:  
 "Emañ Eldad ha Medad, emezañ, o profetiza er hamp!"
28. Raktal, Jozue, mab Noun, servicher da Voizez abaoe e yaouankiz,  
 a zav e vouez da lavared:  
 "Moïzez, va mestr, mirit outo d'hen ober."
29. Ha Moizez da respont:  
 "Perag ez out-te oazuz (pe: gwariziuz) em flas?  
 Salo e lakafe an Aotrou e bobl a-bez da veza profeted,  
 (pe: A! ma karje an Aotrou lakaad e bobl...)  
 en eur rei e Spered dezo oll."

\*\*\*\*\*

SALM 18 / 8,10; 12-13, 14. Diskan: Lezenn Doue 'ro levenez d'ar galon.  
.....

8. Lezenn an Aotrou (Doue) 'zo peurvad; eur vammenn a vuez eo.  
Kelennadurez an Aotrou 'zo difazi; furnez a ro d'an den dizesk.
10. Doujans an Aotrou a zo santel, da viken e pado.  
Menoziou an Aotrou 'zo gwirionez, reiz ez int penn-da-benn.
12. Rag-se ho servicher a gav enno e sklerijenn;  
ouz o mired e kaver gounid braz.
13. Ha koulskoude, piou a hell anaoud e vankou?  
Pardonit din ar pehejou am eus grêt heb gouzoud din.
14. Diwallit ho servicher dreist-oll euz ar pehejou grêt a-ratoz kaer:  
grit ma ne gouezin ket enno;  
Neuze e vin divlam, hag e vin nêt a behed braz.

\*\*\*\*\*

Eil Lennadenn.- Kentel d'an dud pinvidig, a ra kement a zroug  
o veza re droet gand madou ar bed-mañ.

PENNAD EUZ LIZER SANT JAKEZ (5/1-6)

1. Deoh-hu bremañ, tud pinvidig! Skuillit daelou ha klemmit,  
ablamour d'an trubuillou 'zo o vond da goueza warnoh.
2. Ho pinvidigeziou a zo eet brein,  
hag ho tillajou 'zo eet da vaga ar preñved.
3. An aour hag an arhant a zo ganeoh a zo merglet;  
ar mergl anezo a zougo tamall a-eneb deoh,  
hag a zebro kig ho korv evel ma ra an tan.
4. Dastum teñzoriou ho peus grêt, ha goude m'emaom en amzeriou diweza.  
Setu penaoz ho peus grêt d'al labourerien o deus eostet ho parkeier:  
o gobr (pe: o faeamant) n'ho peus ket roet dezo,  
ha krial a ra d'ho tamall;

- ha klemmou an eosterien a zo eet  
beteg diskouarn an Aotrou, mestr ar bed.
5. N'ho peus klasket, war an douar, nemed beva en dudi hag er plijadureziou;  
kaledet ho peus ho kalonou ouz poaniou ar re all,  
en deiz ma oa lazadeg tud.
6. Barnet ho peus didruez, lakeet ho peus d'ar maro an dén just,  
ha koulskoude n'emañ ket a-eneb deoh.

\*\*\*\*\*

SALUD D'AN AVIEL.- Alleluia! Aotrou Doue, digorit or halon,  
mall on eus da zelaou ho Mab.- Alleluia!

PENNAD EUZ AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT MARK (9/38-43, 45, 47-48)

38. En amzer-se, an abostol Yann e-neus lavaret da Jezuz:  
"Mestr, gwelet on eus eun den o kas kuit an diaouled dre hoh ano,  
hag on eus klasket divenn outañ."
39. Respont a ra Jezuz: "Arabad divenn outañ,  
rag n'eus den a gement a rafe eur burzud dre va ano,  
hag a yafe buan da gomz fall diwar va fenn.
40. An neb n'emañ ket a-eneb deom, a zo a-du ganeom.
41. Piou bennag a roio deoh da eva eur werennad dour  
dre an abeg ma'z oh diskibien d'ar Zalver,  
e gwirionez, m'hen lavar deoh, ne gollo ket e hobr (pe: rekompans).
42. Ha piou bennag a vo penn-kaoz da goueza er pehed  
evid unan euz ar re vianig o deus feiz ennon,  
gwelloh eo dezañ e vefe staget ouz e houzoug eur mên-milin  
hag e vefe stlapet er mor.
43. Ha ma vez da zorn o tougen ahanout d'ar pehed, troh anezañ,  
rag gwelloh eo dit antreal er vuez gand eur vreh mogn  
eged koueza gand da zaou zorn e toull ar gehenn, en tan na varv ket.

45. Ma vez da droad o tougen ahanout d'ar pehed, troh anezañ,  
rag gwelloh eo dit mond kamm d'ar vuez peurbaduz  
eged beza stlapet gand da zaou droad e toull ar gehenn.
47. Ha ma vez da lagad o tougen ahanout d'ar pehed, tenn anezañ kuit,  
rag gwelloh eo dit mond born e rouantelez Doue  
eged beza stlapet gand da zaou lagad e toull ar gehenn,
48. e-leh m'emañ ar preñv na varv ket  
hag an tan n'heller ket mouga."

\*\*\*\*\*

\*\*\*\*\* OREZONOU AR 26° SUL

\*\*\*\*\*

\*\*\*\*\*

KEMPEDENN. - Aotrou Doue, o kaoud truez hag o pardoni e tiskouezit ar gwella  
ez oh oll-halloudeg;\* skuillit 'ta muioh-mui ho trugarez warnom,  
ha grit deom kerzed gand mall war hent ho promesaou,  
da hounid on lod e madou ar baradoz.

Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou, Doue beo.....

WAR AR PROVOU. - Plijet ganeoh, Doue trugarezuz,  
ober digemer vad d'ar brovadenn-mañ a ginnigom deoh,  
ma tarzo diwarni, evidom, mammenn an oll hrasou.  
Dre Jezuz Krist, or Zalver.- R/. Amen.

GOUDE KOMUNIA. -

Aotrou Doue, ra vim renevezet korv hag ene gand ar zakrifis santel;  
goude m'on eus kemeret perz e Pasion Or Zalver  
en eur lida an overenn gand ar zonz euz e varo,  
grit ma vim lodeg gantañ ivez e gloar ar baradoz.  
Eñ on Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan, a oll viskoaz...

\*\*\*\*\*

/ 27° SUL ORDINAL / (4 Here 1970)

Lennadenn Ia.- Doue eo e-neus grêt ar stad a briedelez  
p'e-neus krouet an den gwaz ha maouez.

PENNAD EUZ LEVR PENN KENTA AR BED (2/18-24)

18. Goude beza grêt an den kenta, an Aotrou Doue e-noa lavaret:  
    "N'eo ket mad e vefe an den e-unan,  
    mond a ran d'ober, evid e zikour, aun all heñvel outañ."
19. An Aotrou Doue e-noa stummet, diwar pri an douar,  
    oll loened ar mêziou hag oll laboused an neñv;  
    o digaset e-neus d'an den, da weled pe ano a rofe dezo,  
    evid ma vefe douget gand pep hini an ano roet dezañ gand an den.
20. An den, eta, e-neus roet anoiou d'an oll anevaled doñv,  
    da laboused an neñv ha da oll loened ar mêziou,  
    med n'e-neus kavet hini ebed par dezañ evid e zikour.
21. Neuze, an Aotrou Doue e-neus silet en den eur housk pounner,  
    hag epad e gousk, e-neus lamet unan euz e gostennou,  
    ha klozet ar hig en-dro.
22. Ar gostenn kemeret gantañ diwar an den  
    e-neus an Aotrou Doue savet ganti eur vaouez,  
    ha digaset anezi d'an den.
23. Hag an den da lavared:  
    "Houmañ, er wech-mañ, a zo askorn euz va eskern, ha kig euz va hig!  
    Anvet e vo maouez, pa'z eo bet houmañ tennet euz ar gwaz."
24. Ablamour da-ze, ar gwaz a guitaio e dad hag e vamm,  
    hag en em stago ouz e wreg,  
    hag o daou e vezint unan hebkén.

\*\*\*\*\*

SALM 127 / 1-2, 3, 4-5, 6.- Diskan: Eüruz an hini... (Kantikou n° 11)  
.....  
- ar poz la pe 4e.-

1. Eüruz neb a vev e doujans Doue, hag a heuil e lezenn.
2. Diwar labour da zaouarn az po da zebri;  
eüruz e vi, ha brao e vo dit beva.
3. Da wreg, e diabarz da di, 'zo par d'eur winienn karget a frouez;  
da vugale en-dro d'an daol, par d'ar gwez-olivez yaouank.
4. Ya, evelse e teu bennoz d'an den a zoujans Doue.
5. Ra vi benniget gand an Aotrou, euz lein kêr Zion,  
bemdez a-hed da vuez,
6. Dit da weled bugale da vugale.- Ra vo ar peoh war Israel!

\*\*\*\*\*

Eil Lennadenn.- Jezuz Salver an dud dre e varo,  
hag ar henta euz e vreudeur.

PENNAD EUZ AL LIZER D'AN HEBREED (2/9-11)

9. Jezuz a oa bet, evid eur pennad, lakeet izelloh eged an Elez,  
hag e weled a reom bremañ kurunet a hloar hag a enor,  
ablamour m'e-neus gouzanvet ar maro;  
evelse, dre hras Doue, evid an oll e-neus tañveet blaz ar maro.
10. Rag Krouer ha Mestr peb tra,  
pa 'felle dezañ rén warzu ar hloar bugale dezañ e-leiz,  
a oa deread dezañ dougent da bazenn uhella ar zantelez, dre boaniou  
ar Basion, an hini 'zo mammenn ar zilvidigez evito oll.
11. Rag Jezuz o rei santelez, hag an dud santelleet gantañ,  
a zo oll euz ar memez Tad.  
Setu perag n'e-neus ar Zalver méz ebed oh envel anezo e vreudeur.

\*\*\*\*\*

SALUD D'AN AVIEL.- Alleluia! ...

PENNAD EUZ AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT MARK (10/2-16; pe diverret: 2-12)

2. Eun deiz, Farizianed a dosta ouz Jezuz;  
evid e baka en e gomzou, e houlennont outañ:  
"Daoust hag e hell eur gwaz kas kuit e wreg?"
  3. Jezuz a respont dezo: "Petra e-neus gourhemennet Moizez deoh?"
  4. "Moizez, emezo, e-neus aotreet  
rei eul lizer a zisparti ha kas kuit ar wreg."
  5. En taol-mañ, Jezuz a respont dezo: "Ablamour d'ar haled a galon ma'z oh  
e-neus Moizez skrivet al lezenn-se.
  6. Med, e penn kenta ar bed, Doue e-neus grêt anezo gwaz ha maouez;
  7. ha rag-se ar gwar a guitaio e dad hag e vamm, hag en em stago ouz e wreg,
  8. ha ne vint o daou nemed unan;  
evelse, n'eus ket mui daou anezo, med unan hebkén.
  9. Arabad d'an den, eta, dispartia ar pezh e-neus Doue unanet."
  10. Eur wech deuet d'an ti, an diskibien a ra goulennou ouz Jezuz  
adarre war ar poent-se.
  11. Hag e respont dezo: "An neb a gas kuit e wreg  
hag a gemer eun all, a ra avoultriaj en he ehñver.
  12. Hag eur vaouez, ma kas kuit he gwaz evid dimezi d'eun all,  
a ra avoultriaj ive."
- Amañ e heller krenna.
13. Tud a oa hag a zigase dezañ bugaligoù da douch outo,  
med an diskibien a ree gourdrouz dezo.
  14. Ouz o gweled, Jezuz a ya droug ennañ hag a lavar:  
"Lezit ar vugaligoù da zond beteg ennon, ha na virit ket outo,  
rag d'ar re a denn dezo eo rouantelezh Doue. . . . . /

15. E gwirionez, m'hen lavar deoh,  
an neb na zigemer ket rouantelez Doue evel ma ra eur bugelig  
n'antreo ket e-barz."
16. O starda 'ra neuze etre e zivreh,  
hag o benniga en eur lakaad e zaouarn warno.

\*\*\*\*\* OREZONOU AR 27° SUL \*\*\*\*\*  
\*\*\*\*\*

KEMPEDENN.- Doue oll-halloudeg ha peurbadel, ken brokuz en ho madelez  
ma roit d'an dud ho ped en tu all d'o meritou ha d'o goulennou,  
skuillit warnom ho trugarez,  
koulz evid pardoni kement a zo o poueza war or houstians  
hag evid rei deom beteg ar madou na gredom ket goulenn.  
Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou.....

WAR AR PROVOU.- Plijet ganeoh, Aotrou Doue, digemer ar zakrifis  
savet gand ho Mab diwar ho kourhemenn;  
ha, dre an overenn zantel, a 'fell deom lida  
hervez ar garg roet deom euz ho perz,  
lakit da ziskenn ennom ar grasou a zantelez  
gounezet gand Or Zalver ouz or prena.  
Eñ on Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan, a oll viskoaz...

GOUDE KOMUNIA.- Ho pedi a reom, Doue oll-halloudeg:  
gand ar zakramant on eus bet, grit ma vo torret deom  
sehed ha naon an ene,  
ha ma teuim da veza unan gand an Hini a resevom evid or magadur,  
Jezuz Krist, or Zalver.- R/. Amen.

\*\*\*\*\*

GOUEL GINIVELEZ AR WERHEZ - 8 a viz gwengolo -

Lennadenn Ia.- Er Skritur Zakr, ar homzou a glevom a zo  
lavaret gant Furnez peurbadel Doue; med ken gwir int e-keñver  
ar Werhez Vari, a zo a-viskoaz e spered Doue.

PENNAD EUZ LEVR AR FURNEZ (Prov. 8/22-31)

22. An Aotrou Doue e-neus roet buez din er penn kenta euz e oberou,  
a-barz m'e-noa grêt netra, a oll viskoaz.
23. Araog peb amzer on bet furmet, e penn kenta peb tra,  
pa ne oa ket a zouar.
24. Ar moriou don ne oa ket c'hoaz anezo, ha me 'oa ganet;  
ne oa ket c'hoaz dour-zaviou (pe: mammennou) o tarza.
25. A-barz m'eo bet diazezet ar menezioù braz,  
araog an torgennou ez on bet ganet;
26. n'e-noa grêt c'hoaz nag an douar hag ar mêzioù,  
na danvez kenta ar bed.
27. Pa gempenne an neñvou, me 'oa eno,  
pa stigne kelh an oabl a-zioh gorre ar mor don,
28. pa stage ar hoabr (pe: ar houmoul) uhel en nêh,  
pa zalhe war mammennou an dour,
29. pa verke d'ar mor e harzou, gand divenn d'an dour da vond dreist,  
p'edo o startaad diazezoù an douar.
30. En e gichen edon o rén al labour, hag e zudi a reen bemdez,  
dalmad o hoari dirazañ,
31. o hoari war voul an douar,  
ha va dudi a gaven e-touez bugale an dud.

\*\*\*\*\*

AR SALM a zo kinniget, er bajenn war-lerh, hervez daou stumm: unan hervez  
ar "Missale" nevez, egile troet diwar al levr-overenn koz.

SALM 12 / 6ab, 6cd, gand an diskan euz Izaiaz 61/10 "Gaudens gaudebo":

Diskan: Birvi 'ran gand al levenez ( a hell mond war don  
..... én Aotrou, mestr braz ar bed; ( "I.V. ar Porzou".  
ha tridal a ra va halon (   
én Doue 'zo va Zalver. (

12/6ab. Va Doue, fizians am eus en ho madelez;  
tridal a ray va halon ablamour d'ho silvidigez.

12/cd. Me 'zavo eur hantik d'an Aotrou evid e vadoberou;  
me 'zono war an delenn en enor d'an Aotrou.

\*\*\* Pe, evid mond war an heveleb ton:  
.....

6ab. Va Doue, fizians 'm eus ennoh,- ker braz eo ho madelez;  
ha tridal a ra va halon - 'blamour d'ho silvidigez.

6cd. Me 'zavo eur hantik nevez - d'an Aotrou ker mad ouzin;  
me a zono war an delenn - 'vid enori an Aotrou.

+++++

GRADUAL koz (war don ar Chapeled a joa, pe eun all mentet 4 x 8)  
pe, en eur droha dre zaou werzad, "Ni ho salud, o leun a hras")

- |                                   |                                       |
|-----------------------------------|---------------------------------------|
| 1. Benniget oh, Gwerhez santel,   | 2. Gwerhez Vari, Mamm da Zoue,        |
| Ha din da veza enoret, (Mari)     | an hini 'zo mestr da beb tra (Jezuz)  |
| Rag en eur jom bepred gwerhez,    | brasoh eged ar bed a-béz'             |
| C'hwi zo bet grêt Mamm ar Zalver. | en ho korv sakr 'zo bet klozet.(Mari) |
| (Mari)                            |                                       |

\*\*\*\*\*

Eil Lennadenn. - Pa lavar sant Paol eh anavez Doue ar zent  
a-viskoaz, euz piou ez eo ken gwir hag euz ar Werhez Vari?

PENNAD EUZ LIZER AN ABOSTOL SANT PAOL DA GRISTENIEN ROM (8/28-30)

28. Va breudeur, evid an dud a gar Doue,  
ni 'oar e tro peb tra evid o mad,  
o veza m'int bet galvet hervez e venoz a garantez.
29. O anavezet e-neus a oll viskoaz,  
hag o dibabet da zond da veza heñvel ouz e Vab,  
evid ma vo hemañ ar henta ganet euz kalz a vreudeur.
30. Ar re e-neus dibabet, e-neus ive galvet (d'ar feiz);  
ar re e-neus galvet, e-neus grêt anezo dibeh;  
hag ar re e-neus grêt dibeh, e-neus roet dezo e hloar.

\*\*\*\*\*

SALUD D'AN AVIEL. - Alleluia! -- (Ton n° 73 "Ni ho salud, Rouanez an Elez")  
Eüruz oh-c'hwi, Mari, Gwerhez santel,  
Ha din meurbed a beb seurd meuleudi;  
Rag diwarnoh eo paret war ar bed  
Heol ar justis, ar Zalver, on Doue.- Alleluia!

PENNAD EUZ AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT VAZE (1/1-16 ha 18-23;  
pe 18-23 hebkén)

1. Chadennad tadou Jezuz Krist, mab da Zavid, mab da Abraham.
2. Abraham a zo bet tad da Izaag, Izaag da Jakob, Jakob da Juda ha d'e vreudeur
3. Juda a zo bet tad da Farez ha da Zara dre ar vaouez Tamar,  
Farez tad da Esron, Esron da Aram,
4. Aram tad da Aminadab, Aminadab da Naason, Naason da Zalmon,
5. Salmon tad da Vooz dre ar vaouez Rahab,  
Booz tad da Obed dre ar vaouez Ruth, Obed da Jesse.
6. Jesse a zo bet tad d'ar roue David,  
David tad da Zalomon dre an hini a oa bet gwreg Uri.

7. Salomon a zo bet tad da Roboam, Roboam da Abiaz, Abiaz da Asaf.
8. Asaf tad da Jozafad, Jozafad da Joram, Joram da Oziaz,
9. Oziaz tad da Joatam, Joatam da Akaz, Akaz da Ezekiaz,
10. Ezekiaz tad da Vanase, Manase da Amon, Amon da Joziaz,
11. Joziaz tad da Jekoniaz ha d'e vreudeur da vare an harlu e Babilon.
12. Ha goude an harlu e Babilon, Jekoniaz a zo bet tad da Zalatiel,  
Salatiel tad da Zorobabel,
13. Zorobabel tad da Abiud, Abiud da Eliakim, Eliakim da Azor,
14. Azor tad da Zadok, Sadok da Akim, Akim da Eliud,
15. Eliud tad da Eleazar, Eleazar da Vatan, Matan da Jakob.
16. Jakob a zo bet tad da Jozef, pried Mari,  
ar vaouez a zo bet mamm da Jezuz, anvet Krist (ar Zalver).

----- Amañ al lennadenn diverret.

18. Ganedigez Jezuz Krist a zo bet erruet evelhénh.  
Pa oa Mari, e vamm, dimezet da Jozef, med a-barz m'o doa bevet asamblez,  
eo bet anavezet e oa dougerez dre vertuz ar Spered Santel.
19. Jozef, he fried, a oa eun den santel ha mad,  
ha ne 'felle ket dezañ he dizenori;  
lakeet e-neus en e benn en em zispartia diouti dre guz.
20. Troet e-neus ar zonjou-se en e spered, pa zeu eun El d'an Aotrou  
da bara dirazañ e-kreiz e gousk, o lavared dezañ:  
"Jozef, mab da Zavid, arabad deoh kaoud aon o kemer Mari, ho pried,  
én ho ti, pegwir ar pezh a zo krouet enni a zo euz ar Spered Santel.
21. Genel a raio eur mab, a roiot dezañ an ano a Jezuz,  
rag eñ a zalvo e bobl euz he fehejou."
22. Kement-se a hoarveze evid ma teuje da wir ar pezh e-noa lavaret  
an Aotrou dre vouez ar profed:
23. "Setu e vo ar Werhez dougerez, hag e vo mamm d'eur mab,  
a vo anvet Emmanuel, da lavared eo: Doue ganeom."

OREZONOU evid GINIVELEZ AR WERHEZ VARI

KEMPEDENN.- Pedom Doue...

Plijet ganeoh, Aotrou Doue, digeri d'ho servicherien teñzor ho krasou;  
ha pegwir eo bet paret goulou-deiz or zilvidigez  
gand ar Werhez Vari o lakaad he Mab er bed,  
gouel he ginivelez ra lako ar peoh da greski en on touez ha dre ar bed.  
Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou, Doue beo ganeoh ha...

WAR AR PROVOU.- Ho Mab unganet, Aotrou Doue, ra zeuio e vadelez d'or zikour;  
eñ hag e-neus, en eur zond er bed, sakret glanded e Vamm e-leh he distruja  
ra blijo gantañ or gwalhi euz or pehejou  
ha lakaad or provou da blijoud deoh:  
Jezuz Krist, or Zalver.- R/ Amen.

\*\*\* Prefas ar Werhez, Levr-overenn-aoter, p. 49.

GOUDE KOMUNIA.- Pedom oll a-unan...

Ra drido hoh Iliz, Aotrou Doue, ho peus roet dezi nerz nevez dre an  
overenn zantel,  
gand al levenez a zigas dezi gouel ginivelez ar Werhez gloriuz Vari,  
a zo bet evid ar bed esperans ha goulou-deiz ar zilvidigez.  
Dre Jezuz Krist, or Zalver.- R/ Amen.

~~~~~ Eur gêr diwarbenn KAN AN DIGOR- ~~~~~

Stank eo ar hantikou kaer a heller kemer. An Introït "Salve sancta Parens"
a zo bet troet evelhénn, (Ton "Ni ho salud, R. an Elez":

* Ni ho salud, c'hwi eo ar Vamm zantel, - Ho peus ganet ar Roue, mestr ar bed,
A gas en-dro an neñv hag an douar,- a oll viskoaz, bremañ ha da viken.